

KANTIK Sant HERVE

Patron Lanhouarne

VAR DÛN : *Breuriez ar Feiz.*

DISKAN :

O Patron karantezuz,
Sant Herve benniget,
Grit eur zell trugarezuz
Ouz hor bro, ni ho ped :
Kendalc'hit enn hor parrez
Lintruz feiz hon tud koz
Evit ma zamp eun dervez
Ganeoc'h d'ar baradoz.

I.

Ma zoa ho kerent nessa
Tud paour hervez ar bed
Var barlenn ar vamm vella
C'houi a oue diorret :
Euruz eo ar vugale
A gay enn ho c'havel
Kelennadurez Doue :
Sur e vezint santel.

II.

Holl deveriou ar gerent
'Zo bet grevuz ato ;
Unan a zo, ma sonjfant !
Grevussoc'h c'hoaz hirio :
Pellaat a raint gant aket
Ho bugaligou geiz
Dioc'h ar skoliou kontammet,
Dioc'h ar skoliou difeiz.

III.

D'ann empoent m'edoc'h ganet
Var douar Leon guechall
Lezenn Doue oa miret
Gant ann holl e Bro-C'hall :
Brema ne deo ket rouez
Memes var douar Breiz
Ann dud a zisprij bemdez
Doue hag he Iliz.

IV.


Enn despet da c'hourdrouzou
Itron vad ar Salett
Ar zuliou hag ar goueliou
E Frans n'int mui miret :
Heb abek e labourer,
E vanker d'ann ofern :
Kaiz tud, sioaz ! a gener
Bep sul hent ann Ifern.

V.

Ar zuliou eleac'h beza
Derveziou a vennoz
A zo aliez brema
Derveziou a valloz :
Evit pellaat, d'ar zuliou,
Ann dud dioc'h an Iliz
Dre holl e vo ebatou...
Mouga ' ranker ar feiz !

VI.

N'euz fors ' pe leac'h ez eomp
Var ar meaz, er c'heariou
Ama, ahont petra glevomp ?
Malloziou, viltansou :
Fouge ' zo enn dud hirio
Tud koz ha tud iaouank
Kaout eun teod a zislunko
Breinadurez ha fauk.



VII.

Great o c'heuz enn ho puez
 Meur a vech burzudou :
 C'houi laké loaned gouez
 Da blega d'ho komzou :
 Ezomm o pe da reiz
 Kals tud savet e Breiz
 Hag o deuz poan o soubla
 Da genteliou ar feiz.

VIII.

Deoc'h ne roaz ket Doue
 Sklerijenn ann douar,
 Mes bet en doa hoc'h ene
 Unan all heb he far :
 Dreizhi c'houi vele skeduz
 Zoken e kreiz ann noz
 Tenzoriou kaer bro Jezuz,
 Joaiou ar baradoz.

IX.

Var douar Lanhouarne
 E teujoc'h da vervel ;
 Ama oue, dre urs Doue,
 Beziet ho korf santel ;
 Ama ez euz c'hoaz hirio
 Lod euz ho relegou ;
 Rag-se deomp roit ato
 Sikour ho pedennou.

X.

Pa zeu dervez ho pardon
 Ez eomp holl joaüz
 Varlerc'h ar brosession
 D'ho feunteun burzuduz :
 Dour ho feunteun aliez
 D'ann ene a ra vad ;
 Rei a ra pare bemdez
 Euz ar boan daoulagad.

XI.

Iaouankik o poa goestlet
 Ho kalon da Zoue ;
 Ho sonjou a ioa troet
 Dalc'hmad var zu ann ee :
 Grit ma vezimp aketuz
 Da vont var ho roudou
 Evit ma pignimp founnuz
 E skeul ar vertuziou.

XII.

Diwoallit ho pugale
 Er bed ' so ken trompluz :
 Lakit douñ enn hon ene
 Guir garantez Jezuz :
 Neuze p' or bezo treuzet
 Ann draonienn a zaelou
 E vezimp holl kurunet
 Gant Doue enn envou.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 16 Décembre 1910.

A. COGNEAU,

VICAIRE GÉNÉRAL.